

(315, suite)

Continuation
Oberiou caër Napoleon - Vras,
Adalec an 8 eus a vis Dù 1806, betek an 8 eus a vis c'hoevrer 1807,
devez memorabl eus a vataill Eylau.

Dre F^s Guenveur .

Var ton Chançon Patriet Ploumevez .

(316)

Evit ho tiscadurez e meus dija roet
Selêrijen d'è'h, va brois, var afferiou brudet,
Èruet en diou gampagn, en pèvar mis amzer,
Pere rento hir-badus hano hon Impaler .

Hon Haros, en trêgont de, en deus bet gemeret
Calz a vrojou, a queteriou, evel hon eus gûelet .
Cetu amân hanoujou ar placou bras nerzjus
Sujedet en amzer - ze var stajou Roue Pruss .

Da c'houzout: Kder gapital a zugach Magdebourg,
Var rivier vras an Danub, ar queter vras a Neubourg;
Er vro kuel eus ar Sax, Stetin, Custrin, Spandau,
Hac er Silezi, Glogau, hac ar plac a Vreslau .

Er queter hanvet divea eus caveret mortezou,
Poult, canonniou, fusuillou, bombou ha bouledou,
Avoalc'h evit gemeret daouzec plac all nerzjet,
En dilac'h hon armeou, ma rijent bet chommet .

Ar vrojou - mân, emedoc'h, ne hanaveomp get .
M'oc'h entent, va brois ger; mes pa vo èruet
Ar yaouanqis en o brô, golset a lore,
E cânfot gant plizadur an detaill - mân deze .

(317)

Sônj oc'h eus bea lennet e tleze Alexand
Distruji hon arme - vras cazi en eun instant,
Ma n. rije Roue Pruss deut abenn anezi,
Evel ma voe e greden, gent equet attaqi .

282

« Me gav, eme Alexand, breman evel netra
 » Gant eun nebeut a gouraj Napoléon bunta,
 » Rac-se-ta, va zoudarded, n'en em spouronit gen
 » P'en em gavot er vech - man dirac ar Francisien..»

Ar c'homzou - ze zo c'hoarzus a c'henou Alexand,
 Dre ma roont da c'houzout dre oll patantamant,
 E voe spontet e drouplou en divea combat,
 En affer - gaer Austerlitz, devez a vemor vat .

Breman - zouden e velfomp hac int o deus heuillet
 Ar vech - man arison eur mestr re aheurtet,
 Mes disquozomp da quenta c'hoas an improcrizi
 Remercabl en douconi Impalaer ar Russi .

« Mescomp, eme Alexand, ô va oll sujedet,
 » Hor suppliou a galon ; evel don goulennet
 » Eus gouarner ha Mestr bras ar rouantelezoù,
 » Ma teuzo dre vadelez da zouten hon armou .

» Goude pedennou fervant, deut eta gant primdet
 » Dre gonfiang en Doue hac en hor zoudardet,
 » En furnez ho General, a bell - zo approuvet,
 » D'ober ar sacrificiou gant ho priô goulennet..»

(318)

Cete arze 'r giir gomzou an Impalaer Russ
 En e zisclaration evit souten ar Pruss.
 Mes Doue ar justiz vad bigen ne autreas
 Pedennou intereset ar chicanerien vras .

Neuze da zicour ar Pruss e cassas e arme,
 Evel ma voant accordet, mes diveat e voe.
 Guillou en deus bet affer eus eun den acqedus,
 Hastif en oll afferiou, dre furnez difius .

Goude ma voe bet gantan armeou Pruss scubet,
 E qerzas da ziarben ini 'r Russianet,
 Pini eus a Austerlitz a c'houlenne revanch,
 Gant eun esperang tromplu en devije giuell chanç .

Evit mont eus a Verlin var blacen ar gombat,

Hon Haros a ras buan cant-antèr-cant lèo vad ;
En rouantelez Pologn, entre diou rivier vras,
E tleze an arme Russ bea distrujet c'hoas .

(319) Goude ma voe bet eno en em fortifiet
Dre quement seurt labouriou er brezel pratiget,
E solemnizas eur goïel, gant eur joa ridicul,
Mes allas ! prestic goude en rancas mont a gul .

O c'hortoz ar Francisien, pennou-bras an arme
A lavare entreze : « Trec'het raimp varneze,
» Rœc hon trouplou moustachus, a gredomp dre arvanç,
» Ne vezint get spouronet dirac Inugale (France .) »

Hoguen ar voyen divanc evit nonpas spontez
Dirac hon arme vaillant, dêze pi'en em dosta,
A zo covec ar furnez dirazi da dec'het,
Ar pezh a voe sicutet gant ar Russianet .

Hon Haros o attacas en penn e leonet,
Entre 'r Bug hac an Naren, rivierou lavaret ;
Ha moustachou Alexand ne voent get pell neuze
Oc'h abandoni 'r blacen d'eur vanden Inugale .

Trouplou nombreux, placet mat, voa farcus da velet
O redet dirac hon re evel tropel demved ;
Oc'h ober dilez gante eus o magazinou :
Coll calz demeus o banden, acqijach hac armou .

(320) Dre eur boneur evintè, e voa fall ar sèzon ;
Abalamour d'an dra-ze e ras Napoleon
Qemer repos d'e arme, pa ne alle ruilla
E c'haonion dre 'n hentchou, gement a foug a ~~voe~~ .

Partout dre ma tremene an arme Russ spontet,
O tec'hel gant buander dirac hon haroset,
E deus lêzet preuvennou eus a vriganderez,
Dre 'n tân, viol ha pillach, ha dre galz muntrerez .

An traou-màn zo êruet vardro fin mis Qerdu ;
Mes evel ma tigoas prest goude a bep tu,

284

Da zicour an dec'herrien, nombr bras eus a vrendeur,
E tistrojont var o c'his entro fin mis gïenveur.

En o c'hantonieu gouân e sônje d'ê surpren
Hon arme, a voa blauget, dre neuz ar yenien;
Mes o design voe gïelet gant Prinç Pontecorvo (1)
Pini dre urz e chef-bras o chasseas afo.

Pêvarzec mil Russian, dre eiz mil eus hon re,
A voe en affer gaer-mân broustet rust adare:
Daou vil tregont aneze var blacen a chommas,
Pemp cant a voe prisonniet, hac ar rest a dec'has.

Neuz, en nebeut amzer, arme ar Francisien
En em gavas rassamblet, e Chef bras en e fern-
Eruet en bêr-amzer eus a guer Varsovi,
D'en em gaout en Vilamberg gant e vrezellidi.

(321)

Ar c'henta eus mis c'hoerter e voe apercevet
Penn-Aroc an arme Russ varnomp-ni distroet,
Gant dezir d'hon ataqi tost da guer Vilamberg;
Mes diaroguet e voe gant an Duc-bras a Verg.

Er memes amzer ive, ar general Guyot
A quemeras Keer Gustad, d'hon adversour depot:
C'hoerzec-cant prisonnier Russ ha calz a garonniou,
Munitionou brezel hac o magazinou.

An drivet, eus ar mintin, arme Russ pourbuet
Tortic da rivier Vistul a voe gïelet renget;
Da deir heur goude creiz-de voe commanceet ar bal,
Pehini a voe mèret evel d'an ordinal.

Entropad memes amzer, ar general Nei
En devoa affer ive ouz eur c'horf enemi,
Pini, evit sortial eus a queilladurez,
A deu da glasq e varo dre ar rayonetez.

Souden e voe dismantet qercoulyz ha pourgasset;

(1).- Bernadott, maro Roue ar Suéd.

(322) C'hoezec canon, deg banier en deus abandonet;
 Daou vil den ermes combat, ha c'hoec'h mil prisonnier
 Zo ar resultat eürus eus ar bemp a c'hoervrer.

Ar c'hoec'h, pa voe èruet en qichen kaer Glandou,
 E voe güelet adare calz a rejimantchou,
 Pere, dre 'n Duc-Bras a Verg a voe souden güintet:
 Diou en antier anêze en deves destumet.

Ar zeiz, qerqent hac an de e voat var o fasion,
 En despit d'ar goal-amzer ha d'an erc'h dre 'n hentchou,
 Rancouret voent adare en qichen eur c'hoad bras;
 Calz aneze qemeret ha tri-c'hant lazet c'hoas.

Hon arme-vras, en Eyleau, goude zo èruet
 En pelec'h ive 'velas arme 'Russianet,
 Nervet a galz a drouplou en qichen ar quær-mâ,
 Ha c'hoas oussen qementoe placet eus ar güelle.

En kaer o devoa ive rejimantchou lèzet;
 Eur ilis hag eur vèred o devoa bardellet,
 A belec'h e soutenjont eur gombat ar ruista,
 Mes da zeg heur eus an nös e rencjont dileja.

(323) Prestit hoc'h attantion breman, tud qez va brö,
 Da zelaou divis bataill hanvet hini Eyleau,
 An terrupla eus ar re bete breman brudet,
 Gouezet gant eun Haros ne voe biscoas trec'het.

An eizret, diouz ar mintin, pa veljot sclerijen,
 E commançjont attaqi dre eur gannonaden;
 Bonapart, eus an ilis, o devoa dilezet,
 A roas d'e oll drouplou an urzou voa dleet.

An Arme Russ voa placet var eur mene bian,
 Hac ini Napoleon en em gave dindan;
 Dizanvantaj remereabl evit hon haroset,
 Mes dre vaillantis impar o deus e dremenet.

Qent eguet eun anter-heur, demeus an daou goste
 E commançjot da denna an eil var eguile;

286

Ar Russianet a voa serret en colonen,
A geverer gant hon arme var hed eun anter-tenn.

Hon Tennou a zistruje soudarded arme Russ,
Hac o re a re ive hon trouplou courajus;
Rac an douar digompéz, hac an erc'h a goee,
O ampechas eur pennad d'allout tostet d'êze.

Eur barad erc'h estonus a deuas da ober,
Evel na veljot biscoas o coea eus an êr;
An amzer a voa teval, er froent ne velet get
En nep costé d'an arme teir pe beder garnet. (324)

Dre eur seurt tevalijen n'aljot get cundui
Ar bunt a c'houarnamant enep d'an enemi.
Entro pad eun anter-~~her~~ meurbet difavorus,
Entre ar gombaterien voe ar victor douetus.

Mes pa deuas an amzer goude da veza sclêr,
Ar general Duc a Verg a redas gant herder
Enep d'an enemiet gant e gavailliri,
En eur circonstanç pressus, mar boe biscoas hini.

Ar Russianet var varc'h en deus souden quintet,
Petra benac m'o devoa souten ostant clasqet.
Al lazerez voe horruhl : diou reguen soudardet,
Dre gourach hon haroset a veljot dispennet.

Al lignen all a stourmas, favoret gant eur c'hoat,
A vire deus hon trouplou d'allout outi tostet;
Gouscoude dre 'r stoc bras-mañ dispar ha surprenus,
E voe diroudded ouspen uquent mil soudard Russ.

Gardou an Impalaer diou vech o deus treujet
Arme an enemiet, cant anê voe lazet; (325)
Mes, ô courach digompren ! endro d'ê zo caret
Ouspenn mil soudard maro eus ar Russianet.

Eur victor bet pell douetus erfin voe rezolvret;
Evel m'êr devoe Davoust an arme Russ triët,
En vên e clascas goude gemeret adare

E flaç caer ha profitabl var bladen ar mene .

Collou ar Russianet a zo incalculapl,
Hac ar re hoñ eus souffret a zo considerapl:
Tri - c'hant guèolion tãñ flammët, renqet en douou goste,
A lanças daouzec heur vad ar maro aneze .

Hor c'holl-ni a zo, sivoas, a nontec - cant maro,
Ha demess ar re vlesset pemp pe c'hoec'h mil vandro .
Seiz pe eiz mil Russian er blacen zo cavet,
Hac oll tiez ar c'hanton leun eus a re vlesset .

Daou varnuquent general eus hon enemiet,
Ha nao - c'hant deg officer er vataill zo lazet:
En ur guer, er vataill - mair, oupen triegont mil den
Zo lazet pe brisonniet dre nerz ar Francisien .

(326) Tud a galonou tener, tostait o speret
Da blacen al lazerez, re euzus da velet!
Eno, var eul lèo garre, e veler an douar
Golet dre ar mercou eus ar brossa glac'har .

Pemp varnuquent peç canon a chommas er blacen,
Gant o reneryen friget, cavet en o c'hichen:
Ar flaç a voa goarnisset a douou, casgennou,
A evach hac a vara, a boult, a vouledou .

Nao pe deg mil corf maro, ha pemp mil a ronçet,
Pennou, mempron, empennou, a hep coste stringet,
Sier, tamou fusuillou ha tamou sabrennou,
Zo capabl da inspira horrol ar brezellou .

An distruç - mair, hep douetanç, zo crioc'h da velet
Var eun douar digompeç gant an erc'h golet;
Roc an traou du a veler goelloc'h en eun dolen
Pa ve ar fonç diouti en pentadurez guer .

Goelomp gant Napoleon horrolion ar gombat,
Ha pedomp oll a galon Mestri bras ar bed, hoñ Tad,
Da zigueri daoulagat princet re obstinet,
Ma teuyont goell da espern buez o sujedet .

Lies zo de proposet abers Napoleon
 Eur pesc'h deziret gantain, mes just en peb feçon :
 Hoquen, ar Zoz, fuloret, cos d'an oll valeuriou,
 A ranc, qent equet coea, glac'hari ar vroyou .

(327)

Mes dre fermder ha proudeuz, cetu-en chasset
 Eus ar vroyou ma tenne an anter eus e voed ;
 Cetu eta n'antet oll drofic ar Zozon,
 Gen na vint dibennadet dre neuz Napoleon .

Er Pruss, en Holland, er Spagn, evel en Itali,
 Er Pologn, en Danemark, qercoulz hac en Turki,
 Erit ar Zozon cruel ne zeus nep pors digor,
 Gen o devo franchizet dre oll trafic ar mor .

Habitantet a Dreguer, a Guerne, a Leon,
 Heulliet e meus evidoc'h pasiou Napoleon,
 Erit ma ellot ive, endro d'oc'h oalejou,
 Parlant gant ho pугale deus calz e labouriou .

Bete vremen, mignonet, ne meus netra scifet
 A eneb ar virione dre oll anaveet :
 An daou divis diaroc, vel ar present hini,
 Ha qement a scifin c'hoas a ellit da qredi .

(Vol. VII, p. 315-327.)
 strophes non numérotées.